

# LOUARINIG

Niverenn 1



ML



Gouel er Mec'hiko



Richarzh Kalon-Leon



Ar goumoulenn boultrenn



# Potto Bosman

**E-touez gwez koad-meur trovanel Afrika e vev ul loen didrouz-tre, ar Potto Bosman.**

Stag ouzh e vrank, e tremen ar potto e zevezh-pad o kousket. Dre ma ne zihun nemet pa deu an noz. D'ar poent-se, neuze, ez a da glask frouezh, ar pezh a ya d'ober lodenn vrasañ e vevañs.

« Lezirek » a vez graet ivez eus al loen bihan daoudroadek-mañ, dezhañ un hirder a 45 cm d'ar muiañ. Anvet e vez evel-se abalamour d'e fiñv gorrek-tre. Gell-rous ha druz eo e vlev. Met livioù disheñvel a c'hell kaout hervez e annez. Ur beg bihan ha daoulagad bras en deus.

Ur wech stag ouzh ur brank ne zistardo ket dre zegouezh. Un tamm mat a nerzh en deus. Biz-yod e zorn a zo kalz bihanoc'h, ha dezhañ tamm ivin. Reiñ a ra da grediñ n'en dije nemet pevar biz.



A vrank da vrank e ra e dreuzkerzh. Da 30 metrad uhelder a-wechoù. Ne lamm morse nemet e kemer a-wechoù ul lianenn evit mont berroc'h. Ral eo dezhañ dont war an douar. Ur preizh aes e teufe da vezañ.

E-unanik e vev, pe a-goubladoù da vare ar parañ. Goude bezañ bet c'hwec'h miz o tougen e roio ar barez



buhez d'ur babig a chomo peg mat ouzh kof e vamm.

Diaes da spurmantiñ e chom ar Potto kuzhet mat e-touez delioù ar gwez evit derc'hel penn

d'e breizherien, an nandinie, ar piton pe ar banterenn. Ma c'hoarvez gantañ bezañ en arvar e c'hell en em leuskel da gouezhañ war an douar a-benn klask tec'hout dirak e enebourien.

